




CHANSON NEVEZ

Var sujet glac'har ha tistidiguez daou
den yaouank demeus a baros Speyet,
prest da yervel gant ran-galon.

Tud yaouank d'eus ma faros, distroet, me ho ped,
Da zilaou ar vuez, 'zo guenin erruet,
Me zo eur serjant-major, tistrei d'eus ann armeo,
Rejouisset ma c'halon, hoc'h antreal bars er vro.

Pa voan-me partiet, da gommanç va c'honje,
'M'oa losket var ma lerc'h, objet va c'harante,
'M'oa losket var ma lerc'h, fleuren ar ya uankis,
'Vit mont d'obêr eur c'hampago, trezeg ar guer a Baris.

Epad pevar bloas anter, e zon bet em rejimant,
Hi n'eus gret va holl chagrin, ha va brassa tourmant,
Bep nôs ha bep mintin, epad ann deiz aliez,
Va speret a nije beteg ty va mestrez.

Ma speret a nije beteg va brô beniguet,
O sonjal a bep moment 'bars va amzer tremenet.
C'hoarvezout a rei guenin eguis gant ann durzunel,
Pa ve collet ganty e far, a em dol da yervel.

Ganeomp-ni tud yaouank, c'hoarvezo memes tra,
Glac'haret bras a voan, o tont da bartia,
Rannet e voa va c'halon, o tonet d'he c'huitad,
Hi pa velas ac'hanon, e devoa calonad.

Eiz devez arog partial, vijemp assablès bende,
Hag eur sulvez d'abardaë, hi a lavaras din-me,
Ann daëlo 'ne daoulagad, e mouez anter droc'het ;
Petra rin-me, den yaouank, pa vec'hu partiet.

Me ya da vonet breman, da ober pinijen,
Ha da lakat lioua en du, va holl dillajou guen,
Evit ober kaoun braz d'am ma muia caret,
Partiet evit ar Republik, ann deïou tremenet.

Pa vec'h eru 'n'o rejimant, me ho ped va servicher,
Da rei d'in d'eus ho kélou, ractal dre eur lizer,
Me a meus chargrin bras, gant aoun a vec'h casset
Enn tu all d'ar môr bras, guis d'ar vartolodet.

Ar bloavez mil eiz kant tri-uguent a daouzek,
Da zevez gouël ann Nedelek, a voan-me partiet,
Da zevez gouël ann Nedelek, da zegueur d'eus an nôs,
Pa voa ma c'hamaradet holl, o vonet da repos.

Voan ho vont da di va mestrez, da laret dei kenavo,
Hi pa velas ac'hanon, a gommanças goelo,
Arça eta den yaouank, m'oc'h o vont er mez ar vrô,
Beuzet e zeo ma c'halon, en eur mor a zaëlo.

Kenavo a laran d'eoc'h, kenavo ma mestrez,
Benn pevar pe bemp bloas, ni em gavo assamblez,
Hi a vouches d'in neuze, n'hi daoulagad ann daëlo,
Hag a coueas d'ann douar, cazi guis eun den maro.

D'ann de kenta bloaz voan erru er guer a Ruel,
Cetu me skrivas eur lizer d'am mestrezig fidel,
Hi a respontas din, pevar devez goude,
Pencs e voa hi clan, clan bras voar he goele.

Ma na deuit d'am c'honsoli, ma servicher fidel
Gant ar chagrin, ar glac'har, me zo prest da vervel,
O pebeus malheur vit eun den, tonet da guitad e vro,
O velet e vuian karet, 'bars toul dor ar maro.

Pa ven e faction, var ar meneiou huel,
Va daoulagad zo troët var du va Breiz-Izel,
Va daoulagad dro ive var du ty ma mestrez,
Mes na velen netra nemet coajou aliez.

D'eus ar mintin a gleven en nombr all lapoussel,
Mouez koant ar rossignol, e beg ar ven pignet,
Ar rossignol a laras d'in dre e vouez melodius :
« Te c'heus ebars ar guer eur vestrez carantezus. »

Eur vestrez leun a c'hlae'har ha karguet a anken,
Abaoue ma zoc'h partiet, ober pinijen,
Neuze a laras d'in, gant e vouez triumphant,
Me gred e zoc'h glae'haret, evel-ty soudard yaouank.

Var da dal ezeo merket, gant liou ann dristidiguez,
Penaos ezoc'h ankeniet, o quitad ho mestrez,
Neuze a ziskennas d'ann traon, da vodik, da vodik,
Hag a teuas var va skoa da gana enr musik.

Ann eostic a laras d'in, gant e vouez triumphant,
Me a vezo fidel deoc'h, keit ma vec'h n'ho rejimant,
Arca eta, eostic bian, mar vee'h d'in ken fidel,
Te a iello evidon da vetek Breiz-Izel.

Ben vare'hoas vintin, kercent vel ma vo sciër,
Te a deuo d'am c'hamp da guerc'hat eur lizer,
Antronoz vin'in, na voa ket sciër an de,
Me glevas ma messajer, var va frenest e kane.

Lavaret a reas d'in neuze dre e ganouen,
Roet d'in ar paper, ma partiin souden,
Arca eta eostic bian, ho tiou askel digoret,
Ha kemeret an hent, da vonet da Speyet.

N'eur errui bars ar vrô, te c'hei da dy ma mestres
Hag a gommenço cana e kichen e frenestr,
Te a lavaro deñ penaos e zout digasset,
D'eus ar guer a Baris, gant he muia caret.

D'an heur an anter nos, erruas an eostic
Da c'houlen digor digant ma mestrezic.
Plac'h yaouank, emezan, digorit d'in ann nor,
Me zo digasset aman gant ma serjant-major.

Hag ann den yaouank-se, hervez a m'eus elevet,
A zo choajet gant Doue evit beza ho pried.
Cetu aman eur lizer a n'eus roet din-me,
Me ya da bartial breman da gonti dezan o toare.

Er blaves mil eiz kant tri-ugent ha c'houezec,
Ar Ministr ar brezel en devoa decidet,
Ar Ministr ar brezel en devoa decidet,
A vije bet liberet tout ar blavez unnek.

Ha d'am mestrez ractal a scrivas eur lizer,
Evit annonez dezi a voant erru d'ar guër,
Me ho ped, plac'h yaouank, a lavaren dezi,
Quemerit ho joaüsted ha kuitañ hoc'h annui.

D'an dec euz a vis du a voan-me partiet
D'eus ar guër a Baris, evit va bro benignet,
Neuse e teuas sonch d'in na demeus ma mestres,
Evit eun den yaouank, pebeus plijadures.

N'eur errui bars er vrô, e zon et d'hi guelet,
Eu em antreal en ty dezi e zoun en em adresset,
Bonjour deoc'h ma mestrez, cetu me bars ar vrô,
Erru oun gant joaüssed da lakad fin d'ho taëlo.

Laket breman e ruz ann dillajou pa gret
Laket lioua e du pa voan-me partiet,
Laket breman ho torn, en hini ho servicher,
Ma vezimp unisset ar rest d'eus hon amzer.

Cetu aman eur seïen, vit fin d'eus hor yaouankis,
A m'eus digasset deoc'h d'eus ar guêr a Baris.
Conservet anezi gant ho koalen arc'hant,
Quen a ieffomp hon daou ous tol ar Sacramant.

FRANÇOIS quès, va servicher, eme ar plac'h neuse,
Na m'omp quet ar bonheur d'errui er poent-se,
Hor c'herent ho deus chenchet abacue zoc'h partiet,
Ni eo ann daou malheürussa, zo gant Doue crouet.

Ma mestres ! ma mestres ! n'am zisconsolet quet,
Car me a meus eur galon a zo tener meurbet,
Me zo eun den yaouank, tistrei d'eus an armeo,
A meus souffret deja nombr bras a dourmancho.

Mes, ebars va oll chagrin, me en em gonsole,
Pa deve sonj d'in ac'hanoc'h, va douç, va c'harante,
A breman, va mestres, m'ar vezomp separet,
Gant eur bared avel me a vo diskaret.

A possubl a ve eta, a m'effemp meritet,
D'eus a beurs hor c'herent, eun dra ker cri meurbet,
D'eus guenin-me d'an ilis, bezomp hon daou fidel,
Eomp d'ober ar bromesse, dirag an Aviel.

Neuze n'hi bedo Doue, hag e vam beniguet,
Da rei da dont d'hor c'herent selêrijen var ar sujet,
Demeus ar bromesse a m'eump-ni hon daou grêt,
Da vervel assambles, queit a vimp var ar bed.

Guir ez eo den yaouank, me guemer eur loden
Demeus ho c'holl chagrin, ha demeus hoc'h anken,
Breman velan ervad, demeus ho propojo,
Evit hor separi, n'eus nemet ar maro.

It-hu breman d'ar guer; ha me a ya ive,
Hag informomp hor zud d'eus bolonte Doue.
Aben dissul d'abardaë, d'eun heur goude creis-te,
Ni en em gavo assambles da gonta hon doare.

N'hi em gavo assambles lec'h a m'eump goulennet
Selèrijenn digant Doue hag e vam beniguet.
Laromp breman eur bater, raog em zispartia,
Quenavo ta ma mesires, queno dissul quenta.

ANN DEN YAOUANK ERRUI BARS TY E DAD.

Me ho ped, va zud quez, silaouit va feden,
Me ya d'expliqua deoc'h, breman va fianeden,
Me ya da laret deoc'h ar pezh zo erruet,
Hag ar pezh a bouez bemde ive var ma speret.

C'houec'h vlas zo tremenet, aboue pardon ar C'hran,
'Voa goneet va c'halon gant eur plac'hik yaouank,
Gant e c'hamaradezet m'oa guelec' anezi,
Charmet oa va c'halon, souezet atao gant-hi.

An eil guech ma e guelis, voa bars ilis sant Pèr.
Daoulinet bars er c'hœur, viz a viz d'an auter,
Eno pa m'oa hi guelec', me a m'oa bet sonjet
Penaos a voa eun elez d'eus an env disquennet.

Pa voa echu an oferen, voan deut er mes an ilis,
D'hi gortos 'bars er verred, goude fin an offiç,
Pa voa o sortial ar mes d'eus ar porchet,
Me zirijas ma fajou 'vit mocet d'e c'havet.

Bonjour deoc'h plac'hik yaouank, rouanez an douar,
Ebars er Finister na vellen quiet ho par,
Goneet zeo ma c'halon, ganeoc'h, plac'hik yaouank,
Lavaret d'in, me ho ped, breman ho santimant.

C'hui e zeo den yaouank, an hini a garan,
N'eus nemedoc'h d'am lakat eürus bars er bed-man,
Ma c'halonik a voa ganoc'hu gonezet
Aboue ar c'henta guech, ma ganeoc'h parlantet.

Ma vezomp separet, me vo ar malheürussa
A zo bet gant Doue crouet bars ar bed-man,
Rac-se eta hor zud quès, designomp hon deves,
Vit ma errufomp tout da barlant assambles,
C'hoant bras a m'eump hon daou da vea priejo,
Evit gallout en em garout betek ar maro.

RESPONT D'AN DAOU DEN YAOUANK.

Selaout, daou den yaouank, ni hon eus ho maguet,
Hag evit dimizi, hor c'honje n'ho po ket,
N'hi na gredomp biken, zoc'h galvet gant Doue,
Car na n'eus evidoc'h, avoal'h a fidelite.

ANN DAOU DEN YAOUANK D'HO C'HERENT.

Aben dissul quenta, epad an oferen,
Eguis domp-ni on daou, goulennit selerigen,
Var ar garantez, a zo en o c'halon,
Hag a pezo respont deus hon affection.

N'deut quiet da gontaria diou garantez parfet,
Pere varvo gant gloac'har, ma vent dispartiet ;
Ni a deu d'o pedi da rei d'eomp o conge,
Ma vezo gret er bed-man, 'r pez zo laket gant Doue.

RESPONT D'AN DAOU DEN YAOUANK.

Inutil ezeo doe'h insisti davantach,
Unan a c'hei d'ar gouent, an hini all d'ar scoulach
N'oc'h ket galvet gant Doue da vea unisset,
Rag-se, eta, daou den yaouank, rag-se em separet.

AN DEN YAOUANK DE GUERENT.

Arça eta, va c'herent, me ia da lavaret,
Rana ret ma c'halon, troubli ret ma speret,
Me ia da laret d'oc'h quenavo ! quenavo !!!
Var c'hoas, pa darzo an de, me a vezo maro !!!

AN DEN YAOUANK RANCONTRAS E VESTRES.

D'eun heur goude kreiste, en gavaz ma mestres,
Hag hi glac'haret bras a leun a distridigues :
« Autrou Doue, den yaouank, o pebeus planeden,
Rannet eo ma c'halon, siouaz, gant an anken.
O kerent maleürus, c'houi ho pe ar galon
Da lezel daou den yaouank da vervel gant ran-galon. »

AN DAOU DEN YAOUANK D'HO C'HERENT.

Preparet o tillad kaon, aben vare'hoas vintin,
Ni a vo kavet maro, dindan ar ven ivin
A zo kichen an Ilis, e kornik ar verred,
A dindan pehini ni a vo interret.
Laket ac'hanomp, ni o ped, dindan ar memes be,
Evit ma vefomp assambles, bed an eternite ! Amen !!!

FRANÇOIS RUPPE,
Ex-Sergent-Major.



CHANSON NEVEZ

*Var sujet ar Gonskrivet yaouank, demeus ar
blaves mil eis kant unek a tri-uguent*

~~~~~

*Domine potentissime, da lumen mihi,  
Me ho ped eta va zud, dont d'an sclérigeni,  
Evit ma c'hallin discleria va buez tremenet,  
Hac ar poaniou da bere, siouas ezon sujet.*

*Digorit ho tiou scouarn, selaouit un den yaouank,  
Pehini n'eus quitet e vro, er blaves-man presant,  
Er blaves mil eis kant daouzec a tri-uguen,  
D'ar bemp var-uuguent a viz kerzu, evit rei da gompren.*

*An deis-se d'eus ar mintin, voa deut an ordrenañ,  
Da bartial d'an dregont, evit Republik Franc,  
Cetu ar gonskrivet yaouank, holl e voa glac'haret,  
O clevet ar c'hellou se, o c'halon voa rannet.*

*Obliget da guitad hor c'berent, hor mignonet,  
Hor zadou, hor mañou, hor bredeur, hor c'hoarezet,  
Var ma feillen e voa merket ar c'homzou eri a cruel,  
Punisset o vec'h didruez mar vanket d'an appel.*

*O velet ar c'homsou-se, va c'halon voa rannet,  
An door a ziruille demeus va daou laged,  
Cetu me partiet, d'an dregont d'eus ar mis,  
Hirio mon e fort Mont-Valerien, uz ar guer a Baris.*

N'oun quet aman va hunan o souffri tourmancho,  
Pevar all a zo c'hoas, pere zo d'eus ma bro,  
Var sujet d'eus pere, emeus c'hoant da berlanta,  
Car pevar soudard ezint demeus ar vaillante.

Bep noz em dastumomp, arog molt da gousket,  
Hor c'halon ra met unan, pa vemp reunisset,  
Neuse a barlantomp d'eus ar vro, d'eus ar merc'het,  
A mijemp ebars er guer, gant hor c'hamaradet.

Pa iejomp da bourmen, pa deue caos d'eus ar vro,  
Gant daëlo en daou lagad, a c'hlebien an hencho,  
Evel an durzanel kêz, collet ganti e far,  
Pehini em dol da vervel, ractal var an douar.

Pa sonjan em zad, em mam, pere n'eus va maguet,  
Hag ebars an ty eürus lec'h ma zon bet gabet,  
Neuze e ven scoët a ziseconsolation,  
Hag eguis eun tol lang a dreus d'in va c'halon.

Pa deu ebars va memor an amzer m'eus tremenei,  
Gant ma c'hamaradet ha ma c'hamaradezet,  
D'eus pere, allas!!! allas!!! ezon separet hirio,  
Pelec'h ezeo et eta ar blijadurezo.

Meump tanvet assables, coulz an nös hag an de ?  
Cetu ar pes a dremen dre va speret bemde.  
Ma mestres, ma mestres, aman var ma chanson,  
Me em recommand d'oc'h, d'eus a greis va c'halon.

Sonjit bars an hini ho kar, pehini zo en arme,  
Prest da vont en disesper, o c'hortos he gonje,  
Breman a zo pevar bloas, a voan en o kichen.  
Hag an deïo a hirio mon var leign eun dachen.

Pignet var leign eur menez, faç d'ar seiz sort amzer,  
Us ar guer gapital Franc, mon o souffri mizer,  
Divar leign an dachen man, dolan aliez va daoulagad,  
Vâr zu ma bro natal, mes na velan netra.

Nemet ar firmamant, pehini zo us hor pen,  
Hag an heol santel, a ro deomp ar selêrijen,  
D'eus an nôs a velan c'hoas, ar loar hag ar steret,  
Pere gontemplan bep nôs, arog mont da gousket.

Demeus selêrijen pur, pa voan ebars er vro,  
A brofiten 'vit monet d'ober pourmenadenno,  
Cetu souveniriou a zo eri ha cruel,  
Bet truez eus ho pugale, tadou, mamou santel.

Querent ha mignonet, na ouiffec'h ket compren,  
Ar mizeriou a souffromp aman var an dachen,  
D'ar poanion ar brassa ezer sujet bemde,  
Oblijet d'ar faction, couls an nôs vel an de.

Gant ar sac'h var hor c'houg, hor fusul, hor sabren,  
Hag evit em reposit, n'eus nemet eur planken,  
Henes a zo eur guele, a zo ien ha kalet,  
Evit reposit eur c'horf paour, pehini e ve seornet.

O tont d'eus ar faction, dre ar glao pe an avel,  
A glever epad an nos, dre o tiou seouarn o yudel,  
Mar vije lavaret din, breman zo daou-uguent mis,  
Vijen bet quen maleürus, o tremen va yaouank's.

Me mije pedet Doue, da dori va flaneden,  
Mes pa zeo digonet guenin, e zeo ret din e dougneo,  
Hag ebars fin va c'honje, martreze vo brezel,  
Neuze n'eur vro estranjour, marteze vo ret mervel.  
Sonjit eta, tud yaouank, peguer trist ve ar maro,  
Mervel da bemp bla varn-uguent, e creis tan ar c'hanoio.

Ma ya ar c'hellou d'ar guer, da laret a vin maro,  
Laquet guenin, me ho ped, eun nebeut pedenno,  
A neuze ebars ar vro, evel e man ar c'hiz,  
C'houllan guenoc'h eur bater, pe eun de profundis !

Mont a rap, va mignonet, breman da echui,  
Re glac'haret eo va c'halon, vit gallout continui,  
Mes quent evit finissa, m'eus c'hoant da lavaret  
Hano ar pevar den yaouank d'eus pere m'eus komzet.




Hunan a zo e hano Jacques Bourriguen,  
An eil demeus ane, e zeo Even Gourlaouen,  
Isidor Maisonneuve ha Corentin Lagadec,  
An hini diveza zo d'eus Karaës, an tri ali d'eus a Speyet.

Mar m'oc'h elasq gout piou n'eus grêt ar chanson,  
Ma bars er guer a Baris, rannet e zeo e galon,  
Sergent-major e zeo, demeus ar blaves unnec,  
E hano zo François Rupp, demeus a bourg Speyet.

Breman hor pemp assambles, hor speret bars ar vro,  
A laromp d'ar Finister, quenavo !!! quenavo !!!

FRANÇOIS RUPPE, *Sergent-Major*.



---

---

# CHANSON

## AR GUIMPOU

---

Var ton : *Ar pevar elemant*

Didostañt oll tud va bro, me ho ped humblamant,  
Da chilaou cana eur zon grêt gant eun ignorant,  
Non pas vit plijout d'ann holl na ve bet hep e far,  
Mar na ve quet guis eur zon, hi vo vel d'eun histoar.

Grêt silañ d'am freposiou, mar gallit en ober,  
Rag dre ma gouidigues ne larin ket gueñer,  
Dre ma zon eun den farçus, ha n'oun quet studiet,  
Mar teufen da vankout, martreze 'vin excuset.

Pa fell d'in em occupi da rei divertissant,  
Non pas vit ma facho den, na beza drouc-contant,  
Evit elevet eur rêson gret, eguis d'eur badin,  
Eur vintinvez araog lein, varlerc'h ar c'houk mintin.

Tont da gonsideri penos e m'oa chanchet  
An deguis hag ar c'honvers, trezomp va mignonned,  
O velet ann dud dibrez, pe ann dud feneaut,  
Reont nemet pourmen, ha pocho c'hoas arc'hant.

Hag ar paour kès miserabl, al labourer douar,  
E ve bemde clasq an tu da scarza e gontouar,  
Guiriou da bea bep bla, hag alies crespkanç,  
Dre na ve quet ar poëchou egal 'bars er balanç.

An traou d'eus ar plaçou-ze, marc'had mad a verzo,  
Pez'a fot vit e zervich, zo goal guer a breno,  
Goasquet eo a bep-tu an tiec a labour,  
Ar vecherourien guès m'eus ezom d'hen zicour.

Holl an artisanet kement ho d'eus eur vicher,  
Ho d'eus muioc'h a boan evit eur labourer,  
Caër en deus lakat fatig da entreteni e stal,  
Ben pa deu ar bla en dro na n'é quet da vragal.

Dreist pep-tra eur merour a ranq pea fermou,  
Rei loned izel bris ha neuze ho guerzo,  
Donezoni an eil rum a voa mad da ouanva,  
Ma vije ar c'honvers mad, ne voa quet red ho guerza.

An aotro ne ra mann, a lip ato ar zos,  
Ben pa deu Gouel-Mikel, na c'houlo quet gortos,  
Rag ma ne ve quet paet dindan eur miz goude,  
M'an prest d'ober mijo, hep caouët tam true.

Lee'h ober ar c'hontrol, rei deze courach ha ners :  
Deportit, va merour, quen vo mad ar c'honvers,  
Pa zeo guir 'lak e boan, dre mil a mil moyen,  
Cass saout bepret ar foar, vechou gafet quet perc'heu.

Petra e ra neuze, nemet pea coustum,  
Goude c'hoas col e amzer, rosta e dam butun,  
Caouët na tam na banac'h, harp e gueign d'eun hôtel,  
Cavet met esperanç, da scarza e c'hodel.

Dreist pep-tra, mar de ret pea servijourien,  
N'en deo nemet in zicour evit sevel e gueign,  
Comanachou dreist muzul, e ve red da rei de,  
Ha c'hoas arc'hant en avanç, na denn quet anter out-hé.



Gant bugaligou en ty, a ya ive memes tra,  
Quement bars en dispign hag a fell d'ho guiska,  
Potret ha merc'het, pelec'h ema ho derrompaj,  
Me lar bars en davarn e cavont an evaj.

Heno p'eus descadurez, gouret a red tud savant,  
Diskont en em billat ha penaos caout chican,  
Ha c'hoas meur da scoulac'h, hag a ro exemplou,  
Evit mont eon en hent a zoug d'an dizarzou.

Memes tra na servich quet dezan couls hag ar re all,  
Nep na quet vo reputet pe laquet eun den fall,  
Breman ne rer convers na marc'had bet a gren,  
Hep caout da lipat eun tas pe eur banac'h gigoden,

An dra-ze ne quet dizurs da nep voar an usaj,  
Me lar ema agreapl etre ar vignonaj,  
Ne zifenner quet mont na dont bars en hostaltri,  
Met d'eus an hini a ev re da c'hoal restitui.

Na zifenner quet an evaj gant mad hag honestis,  
Met d'eus ar re touellet beteg ar gourmandis,  
Rag an evaj zo grêt evit soulaji ar galon,  
Da nep a voar n'em regli gant moderation.

Mes ar c'hontrol da ze a ve gret aliez,  
Lod a ra dispignou fol var ho dienez,  
Dienez d'é o hunan, ha d'ar re all, vechou,  
Ve red d'é ober cof moan goude ar c'horvadou.

Mes c'honi ive hostichen, evesait d'eus o kont,  
Gout a ret couls ha me, d'ar bed all vo ret mout,  
Pa vo tud re veo 'n ho ty, discoët d'ê hent ar guer,  
Antronoz e vo coutant, c'hui p'o gret o tever.

Hent-all e moc'h oblijet da em zicour ive,  
Rei a ret e donezou meur a vanac'h cafe,  
Evit tenna ho profit, an dra-ze cavan fal,  
Lod a roffe ho skiant vit caouët eur lipat.

Respet an davarn, nag a ve var eur marc'had lez,  
Vechou gant eur banac'h lagout ve tol pev real er mes,  
Gant se merc'het ar boutikou couls hag an hostichen,  
Zo brao d'ezhe breman delc'ha ruz o c'hlipen.

Tre an hostaliri, butun ha guiscamant,  
A ya breman ouzon arc'hant an dud yaouanq,  
Ar butun vel ma ouzer a zo eur louzaouen,  
Cals a raofe eur pred vit caout eur chachaden.

Ar butun zo eun deboch, betec eur pot denved,  
Ve guelel gantan ne vec eur c'horn tenna moguet,  
Hag ar merc'het yaouanq en oad da bemzec vla,  
A guemer d'eus ar butun, ha gout en implija.

Boestou, tabatieren, portrejou a bep mod,  
Hasten d'an eil d'eben demeus ar butun frod.  
Guel a ran modelou neo, voar gresq a yan ato,  
Breman tel var an tapis bep-hini d'le dro.

Breman z'eo deut ar mod na gant ar merc'hedou  
Da lakat dindan ho gronj dantelez pe guimpon,  
Mod brao d'ar merc'hed yaouanq ha da re demezel,  
Propoc'h vent da velet ha guelloc'h estimet.

Breman, deut eo ar mod gant ar merc'hedou tout,  
Da lakat eun dantelez pe aotramant eur lasgouk,  
Hag eur manchou pagot, hunan ve var bep brech,  
Hag eur re louerou guen, gant eur guimp d'eus an nec'h.

Coëfou dantelezet uz ho c'holierou guen,  
Quen du hag eur morian ar c'hrez en ho c'here'hen,  
Dre ma zint brao guisqnet d'eus an traon hag an nec'h,  
A larfec'h d'eus ho guelel, mañt hep manq a nep lec'h.

Voulouset ho broziou betec ho savanjer,  
Gant enn daou pe dri ourliq, setu pez a foter,  
Gant ho chaussenefer piq mareler ru ha glas,  
Traou eziap ar botou, n'a peus guelel biscoas.

Ne quet hep quen ar merc'hed a zigas an deguisou,  
Aroc hoaset en d'eus ive d'eus an instrumanchou,  
Lod a lako dantel demeus ho rochedou,  
Ra voulous d'eus an traon, d'eus foquen o bragou.

Lod all a laq eur vanden gret guis eur chupilis,  
Pozet var eur rochet gros quer du hag eun tapis,  
Henes a zo eur mod mad, ben pa vo sellet pis,  
Evit pa voyen d'ar goan, quit da chanç bep tri mis.

N'eun quin met lakat eur vanden e guis da lassou,  
Cetu eur mod didor evit chanj rochedou,  
Quit da vout fiabousset, n'ag uzet gant an dour,  
Henes zo eur mod digoust d'ar pinvidie ha d'ar paour.

Breman ne zeller quen demeus an dispignou,  
Me a gred a zei pinvidie merc'hed ar boutikou,  
Breman zo deut eur mod nev d'eus ar chupennou du,  
Ar mod eos zo disprijet guis eur c'hornat ludu.

Ya, breman ar c'hoazet ho deveus em aquipet,  
Us eur gourtteen, hep quin, guisquet mod galaouet,  
Eur mod accomed, lar bep hini guis d'eus c'hoant,  
Guechal a voa ret caouët diou, breman ne ve met unan.

Groët d'eus a vezer caëra, hanvezet dra du fin,  
Moulous stris, hini ledan, betec an diou bilin,  
Guechal an diou chupen du a vanque a c'hodellou,  
Breman bars hunan hep quin, e ve groët plaç da zaou.

Evit laquat an traou, butun hag ar pistlennou,  
Vije guechal ar gilet plaç ar mouchouerou,  
Pa zec'h da n'im heurta a n'espèt guis c'hoare,  
Meur a hini a zo bet goal abimet gante.

Mes breman bars ar godel abec a ve d'an nec'h,  
Quen vo losquet an discarg, na rei drouc nep lec'h,  
Hent all e mant traïtour, mar carit va e'hredi,  
Meur a bistolen garguet a zo bet deut da c'hrevi.



Cetu aze va breudeur, eur guir reflexion,  
Nep a sonjo mad enhi, na nei quet an abandon,  
Cetu placet ar butun hag ar sort trahisen,  
Guelomp pelec'h eo placet ar montr hag ar chaden.

D'eus ar giletan dra du hag eur bragou voulous,  
Gant eur model boutonou deut demeus a Vro-Zaos,  
Hag an tockou bordou stris, ornet gant eur penpil,  
Ho bleo a zo rannet guis re an dud-chentil.

Plaç ar boutonou dign e vije guechal o zon,  
E ve placet breman eur chaden pe eur montr,  
Henes zo eur mod honorabl, ve guelet d'eus a bel,  
Gant lod demeus an dud, na nequet estranch da vel.

Gant an dud a galite pe an dud a voyen,  
Ma deze eun amuzant ben pa c'hant da bourmen,  
Da lod en ma necesser eur horlach pe eur montr,  
Evit pellat an danger a meur da c'hoal rancontr.

Ar c'hantongner commandant, evit regli e stal,  
Hag an hostis da zival d'eus ar procès-verbal,  
Evit ma ouio just an heur e ve laquot da enni,  
Ar c'hloc'h nao heur da zon evit scarzo e di.

Guechal met an noblanç, eur montr hag eur chaden,  
Breman ve guelet gant Per a Paul ha Marie-Madalen,  
Brema e ma comun gant eals a dud ar vro,  
Panevit caout traou d'am bec me mije bet hunan pelzo.

Mes mar sonjan caout hunan me a rayo eur yon,  
Me gred a mo unan gant eur blavez butun,  
Breman e ouzoc'h erfat penos e moun ho badin,  
Pa ran divar va c'houst lec'h da re all da c'hoarzin.

N'eur ziscleria ar model demeus an deguisou,  
Pere e veler breman touës ar yaouanquizou,  
Hep laret netra met mad d'eus potret na merc'hed.  
Met laret ar virione evel ma zeo gleet.

Guelet e beuz ar plan demeus an deguizou,  
Consideromp c'hoas an trañ hag ar mecanikou,  
Breman zo mecanikou 'vit sevel doar ru,  
Fot met quezec dioute, trei a reont en daou du.

Fot met trei eun alc'hoec pa ve eru er pen,  
Accomotec'h ve d'an hini ve d'eus ho reen,  
Hag eun neuden orgil hanvet an Thelegraph,  
A breg an eil quer deben, pebeus tra inpantapl.

Ya, eun dra inpantapl evidomp paysantet,  
Hunan benec a oar bars in bet invantet,  
Breman e ve groët quiri curius da velet,  
Hag a cher var an hent bras hep caouët tud na lonet.

A zo eun dra inpentus, gout a ret va breudeur,  
A c'hoas na nanquet difon, pa ran pemp leo n'oun heur,  
Fot met eun den abars a oar an trafic,  
Ha na ne quin da ober met trei ar mecaniq.

Guelet a ran breman d'eus an dud a izign,  
A oar tenna portrejou n'eur zellet d'eus hor min,  
Caër en d'eus evel quent, an dud a izigno,  
N'in quet 'vit digas tud beo goude ma vent maro.

Hent-all e man assuret evit tenna planyou,  
Oalc'h 'vit tapout Lucifer a selenj hed e gorgnou,  
Ne n'oun mui an avanç, poënt eo d'in echuet,  
A rei d'eoc'h da entent pelec'h e ma composet.

Car na fell quet d'in parlant d'eus an electionou,  
Nemet eguis farcal e larin eur guir pe zaou,  
Car guelet e ran erfat, darn d'eus ar baysantet,  
Pa c'houlenner ho monejou, n'ouzont pe du monet.

Mar carfa an dud-chentil, pere c'houlen mouejou,  
Donet da em aviza da rei d'ê banac'hou,  
E ve guelet Yan baysant tont da garga e goff,  
Quen a chomfe a blen rampet eve' eun noc'h.

Ya, darn demeus ar genbil, pa gavont da lipat,  
N'o d'eus moderation nemet ober corvat,  
Ha gant eur chopinat gist hag eur banac'h lagout  
E ma zur an aotrou da gaout ar mouejou tout.

E Moustoar Roudoualec, pozet var eur c'hastel,  
Lee'h n'eus met tour sant Miquel, o torre an avel,  
N'ep a n'eut groët ar zon-man na é mui guiader,  
E hano dre e scritur zo Nicolas Naouer.

A zo breman an noad demeus a dregont vla,  
Nao vla zo dimezet, ha c'hoas a gar cana,  
Rag eur vicher vad en doa evit gonid e voed,  
Panevet ar goal rancontr voa ganta erruet.

Bars er blaves mil eis cant tri-uguen ha daouzec,  
Gant an drouc daoulagad e zeo bet abimet,  
Mes breman eo commancet tamou da labourad,  
Non pas vel diagent, var ar memes etat.

Rag guelet mad ne ra quen, cetu ar malheuriou,  
Mes Doue ro dezan courach dre ma gresk e boatiou.  
Ar zon-ma a zo groët evit rei d'oc'h da entent,  
Bars er blavez mil eiz cant c'huezec a tri-uguent.

Groët ebars e miz gouere, just ar c'henta devez,  
Eur vintivez aroc lein, plaç tenna carottes.  
Breman c'houlennan ar bonheur da guement e c'hlevo,  
Da chom beo ha da vont yac'h tre betee ar maro.



Rac-se eta bretonnet, tchet d'hen himita,  
Da rei zoulach d'ar perc'hen, a zo d'eus e c'hana.  
Poent eo d'in caout eur banac'h, va zeod a vo zouploc'h,  
Marteze m'ho muioc'h a gourach, ar vouez 'vo guelloc'h.

Chanç da guement a glevo pe lenno ar scritur,  
Da gaout bars ar bed all eur plaç a blijadur.  
Cetu aze eur chansou, losquet eo da vale,  
'Vit divertissa an oll partout dre ar c'hontre.

**NAOUR, Nicolas.**



---

---

# BAL NEVEZ

---

---

Ne quet oale'h d'im gout an dansal,  
Ret ze ive ober ar bal,  
Ar yaouanquis a c'houlen  
Bout o talsal pe o pourmen.

Lod ve azeët, lod all n'o zao,  
Cetu aze eur c'honvers brao.  
Aman gontin d'oc'h eur poz pe zaou,  
Divoar boez an dimeou.

N'eus nemet daou dra difeanet,  
A ra ar merc'het d'ar baotret.  
Mont a ran gante da rime,  
Ha discan oute goude-ze.

A la fin ar mear a fæcho,  
An hini a chomo quet a stago.  
Evidome da vurmuri,  
Memeus bet an hini a blij d'in.

## CONTREDANÇ AR PETIT STOUP

Compagnunez n'im assablomp, ha touchantie e elefem  
Eur pen zon divertissant, vit ar re gos ha re yaouanq,  
Hag a boez, hag a joup, var sujet ar petit Stoup.  
Greomp eta pe ma ar guis, tragedi ar petit Stoup,  
Mes aretomp tout assambles, hep dezerti compagnunez,  
Hag a rimp tre m'imp echanj, model demeus ar c'hadans.  
Roulomp an danç hag ebatomp, vit en em divertissa,  
Pa o pedan em arrêtit, fichomp da beil guech hon trajedi.  
Sellomp tout trezec an noap, quit vo den da ober goap.  
Dansomp eta va mignonet, heman eo mod an ebat,  
Mes ret eo goude tripal. n'im arrêti da drechal.  
Petit Stoup, dibadao, ouman zo eun dansiq brao.  
Dansomp eta compagnunez, pe ma zoupl hon izili,  
Vit ma laro ar re zo sellet, penaos vemp tud a ve troadet,  
Laro pep hini guis ma car, ni bioch brao an douar.  
Contredansomp ta, tud yaouanq, pa ma joaüs hor c'halon,  
Hep chonjal en esperanç, e ra d'imp pellaât hor chanç,  
Guel e zo abred dimei, vit n'eo chom pell da gozi.  
Ar c'hontre ma n'euz eis eoubled, ornet d'eus a bemplinem.  
Gret gant an Naour Nicolas, o fourgognal guis ma voa,  
O tivertissa tud e di, manquet cousquet da greis-de,  
An dud-se evel ma ouzer, oa epad an de o fale'had,  
Nicolas plas e gousquet, an devoa bet ho abuzet,  
Na o laquet tout oar voemers, ho clevel eur sort farceres.

FIN





